

(f° 243)

Ar minor haq ar minores.

eur minor deus ar ger man
zo ed d'ober al lez
Da eur vinorez iaouant
Deus a gichen montroulez.

eur dervez goude koan
e komeras e vas
e treuzek ti e verstreiz (1)
en eur bourmen e ias.

Pa voa erruet e Kichen an or
he c'houlene digor
Digoret a voa dezan
antrem a ras en ti.

Pa entreas ebar en ti
e voar e tujuni
e vestres a voa e neza
e padas (2) d'asseza

Da arzeza en e c'hichen
an amser a voa ien.

en avis farsall outi
Diskaras e gwerzjit
ag hi o sevel promptament
gant eur air different.

— neket red deoch beza ker different
evido' h beza koant.

(f° 244)

Ker koant a c'houi a zo er vro
mar karan em bezo.

(1). - Ms.: verstreiz; lire: vestrez.

(2). - Ms.: padas; lire: pedas.

388

maoc'h partout e lavaret
e meus o goulennet .

ne meus ket affer ac'hanoc'h
a balamour d'ho mam

e man partout o lavaret
e meus o goulennet .

Ne meus ket o Goulennet (1)
na no goulennin ket .

me tenffe kentoc'h bleo ma fen
Kent teufen d'ho koulen .

en an Doue Den iaouank
Bleo o fen na tenit ket .
C'houi kavo , me rei ive
P'or bezo bolonté .

7

Jamton Pail , 16, Juin 1851 .

(1) . - Le K est écrit en surch. sur un g .